

# RECIT

## Deus ar Maleuriou arruet en départamant ar Var

EN DRO DA SANT-TIENNE

### OCCASIONET GANT AN ORACH

AR 14 HAC AR 15 A VIS EVEN DREMENET

DON DE M. L. HEMON

Jesus, ma Salver adorabl,  
Obtenet d'ho pec'her ingrat  
Ar sclerijen da discleria  
D'ar Vretonet dre ar vro-ma.

Speret-Santel deus an env,  
Gret din espican hep dale  
Ar suit dimeus ar maleuriou  
Hac an darn deus ar miraclou.

Quement-mâ so bet arruet  
En departamant Var hanvet,  
Dre deluch dour ha curuno,  
Hervez ma raport ar c'helo,

Ma speret so epouvantel  
Ha ma memoar so troublet  
O tonet da sonjeal espican  
Eur malheur an effroyaplan.

Un ilis hanvet Sant-Germain,  
Un templ santel d'ar gristenien  
Gant ar c'huruno atquet,  
Etre ma voat en ofern bred.

Habitantel leis an ilis  
A voa o asoistan en offiç ;  
Den neus gallet sortian ;  
Oll o deus renquet perissan

An douar a deu da grenan  
Hac a ra d'an ilis coean  
Var gein quemend a voa enni,  
En eur momet, d'ho ecrasin.

O ma Jesus ! tristan malheur !  
Dre eur merq dimeus ho c'oler  
Perisset tud en ofern bred  
Hep ma so hini sortiet.

Totaliset gand tud savant,  
Var ar bord a pevarzec cant  
A voa en ilis biniguet,  
Hac a zo devet ha beuet.

Nebetoc'h evit eur card-beur  
Goude ma voa fin d'ar malheur,  
En plaç an ilis so cavet  
Eur stang hir ha ledan meurbet.

Flotanç ar caeran batimant  
So cavet a donder er stang ;  
A c'hoas e lavar ar scritur  
Ne dap quet ar fonç ar mesur.

Pedomp Doue ar vir galon  
Da accordin deze pardon  
Ha d'ho laqat oll da repos  
Er gloar demeus ar barados.

An outro Richard, deus e di,  
Dious e tud o quimiadi,  
A guemeraz e diare  
Da vont da ober eun dro chasse.

Pa voa et dec pas dioute,  
E return e dro adare,  
Hac a lavar n'eur guir cren :  
Adieu, ma zud evit biqen.

An itron, o clevet anezan,  
A commanças da hirvoudan :  
Perac, ma bried, emezi,  
E teut cren d'ho abandoui.

Evel ma hantre er c'hoat bras,  
An dour varnezan a deuas,  
Hac en em retir hep appel  
E appu, er span eur rochel.

Assambles gant an dour courant  
En commanç un tan violent,  
An tempest hac ar curuno  
Quen o sonje a voa maro.

Paron, ma Doue, emezan,  
Aman e renquan perissan,  
Ep gallout en em repuin  
Ha bean calz a vado din.

En eur sevel var eur garrec,  
E neus bet apercevet  
An tan coet dious an evo  
Var e noblanç hac e vado.

O babes desolati-n  
A entreas en e galon  
Guelet consummi e vado  
E vred hac e vugaligo !

An itron, o velet an amzer,  
A supplias prest e mervel  
Da voned da glasq he priet,  
Mar guie pellec'h e voa eet.

Evel ma c'hantre er coat bras,  
Souden gantan e erroas,  
E appu a span eur rochel  
Hac e disposet da vervel.

Sevet, ma mest paour : emezan,  
E oc'h var ar p-eut da perissant  
Gant Doue e eo preserret  
Ho pugale hac ho priet.

Respont a eure d'e vevel,  
E lezel enon da vervel,  
Pa oa consummet e vado,  
E vreg hac e vugaligo.

Renquout a ra touet dezan  
Qen men deus credet anezan,  
E voa preserret gant Doue  
E priet hac e vugale.

Gant calz a boan hac a courrach  
E tenjont er naes ar c'hoat bras  
En dour betec o diou gazel,  
An otro-man hac e vevel.

An otro so n'em vuestet  
Dre eur miracl e vo rentet  
E quichen graio a vezen  
Ne voa e tud evit souten.

Pa voa gant e tud o parlant,  
E ten var e lerc'h un torent.  
Hac a vezena voa eunan  
Neus groet dezan perissan.

Chetu i chomet intanves  
Ha hi leun a tristedigues,  
Er voen gant e zri baguel  
Hac i disposet da vervel.

Pa eo bet bolante Doue,  
E eo et an dour ac'hane,  
Hac in sicouret da disquen  
Gant Doue hon mest souveren.

C'hoec'h heur ha tregont a amzer  
In bet er voezen en mizer  
Da soulagin ho c'helono  
N'ho doa nemert an delio.

Ar mest a commande er forgeo  
An otro Seveni e hano,  
A voa atquet gant an dour,  
Ep gallout dont da n'em sicour.

Prozterni a ran dan daolin  
Da suplian hon Mest divin,  
Il e hon Mam santel ar Verc'hes  
Da vezan e avocades.

Mar sovetean ma bue,  
Ha ma ouvrierien a me,  
Me a savo eun ti a c'haeran  
Evit ar pevien er vro-man.

E nebetoc'h evit pemp minuten  
Eo beuzet e ouvrierien,  
Ar forgeo, varc'hadoures,  
Tout int perisset assambles.

Honor d'an otro Seveni,  
Var an douar ha melodi,  
Ha pa hei divar ar bed-man,  
Ar barados da jouissan.



# RECIT

COMPOSET A NEVEZ

## VAR UN TOL VAILLANTIS

ERRUET A DOST DA PARIS

AN 3 A VIS MEURS DREMENET

*Var eun ton nevez*

Me o ped assistantet da clevet recitan  
Ma-unan hon estonet dimeus a guemen-man,  
Ar pez a so arruet var ar c'hopi gallec,  
Mar gallan gout ar feçon d'ho zrei en brezonec.

Mes, quent avanç davantach, e c'houlan sclerijen  
Digant ar Speret-Santel da riman pen-da-pen  
Quement guir a so scrivet var ar c'hopi gallec,  
Ha d'ho esphean facil d'an oll en Brezonec.

Ur vreg yaouanc magueres, o listref a Paris,  
Bet e querc'hat ur buguel eus a dy ar bourc'his  
Da gass ganti da vagan en toes he bugale,  
Evit zicour o zével ha gonit bara dé.

Dre ur c'hoat a renc tremen o vont da gaout ar guer  
Hac eo bet attaquet, sivouas ! gant ur voler,  
Hac en guisquet en bellec, o tont d'he bonjouri :  
Ar goat en e goaziet a deu da remui.

« Bonjour, eme an den-man erru oc'h, ma greg vad,  
— Ha dec'hu pareillamant emei, autrou 'n abbat ;  
Souet hon ous o goelet aman ho pas-al,  
Rac ar c'hoad-man so brudet da vean un doull fall.

— Doue, eme al laer-man ; a breserv pep-hini :  
Me so aman o vale d'a n-um disenoi,  
Hac he meus ma slijadur o c'hortos overnia ;  
Da laret ma breuvial na deu den d'am zroubla. »

O qerzet en e c'hever en deus interrojet  
Da c'hont a belec'h e teue ha pelec'h e oa bet,  
O voelet e voa ganti var e brec'h ur buguel,  
Hac en guisquet ar c'haeran, casi evel eun æll

Goude en deus goulennet incontinant.  
Ha ne devoa bet netra evit avançamant,  
O quemeret ar buguel da zicour e soigni,  
Da denna ar virioue, ma galje, diganti.

« Eus, emei, autrou 'n abbat, arc'hant a meus touchet  
Cant livr em eus recevet evit e guemeret,  
Nemert ma meus ar greden e collin ma bue.  
Quet mont emes ar c'hoat-man, an innoçant ha me.

— Na sonjet quet qement-se, emean, ma greg vad ;  
Me a vo dec'h compagnon da vont er mæs ar c'hoad :  
E zoc'h gant ar c'habiten, n'ho pezo drog ebet,  
Nemert ma renquet rentan ar pez o c'heus touchet. »

A zidan e soutanen e tennas ur zabren  
Hac e savas anezi ractal a us d'he fenn.  
Hac e c'houlennas ganti ar yalc'h pe ar vue,  
Ha laret dean pelec'h en deus laquet ane.

« Plasset e meus aneze enn dro d'ann innoçant ;  
Goel eo ganae ma bue evit aour hac arc'hant,  
Caët a ret aneze o tont d'e zispaca,  
Ha lest ma bue ganen hac e hini gantan. »

Cregui a ra er buguel en ur memes instant,  
Evit dont d'e zispacan da guemer an arc'hant  
Dre bermission Doue e tapas ur zabren,  
Ha gant un tol, dre vonheur, en deus rannet e benn.

Hep m'en deus bet an amzer da guemer an arc'hant,  
E ranquas mervel eno er plaç subitamant,  
Bag ar vreg, bag ar buguel de viracl zo rentet  
Voar an hent bras pareabl, ep m'ho deus droug ebet.

Tri gendarm a erruas hac o deus goulennet,  
O velet ar goad dionti, petra oa arruet,  
Hac en deveus ispliquet diraze pen-da-ben  
En devoa lazet ar mestr dimeus ar volerien.

« Dont a reet ganemp-ni, emeze, var o quis,  
Evit ma elfoump goelet ar merq ho vaillantis. »  
Pa oue fouillet an den-man, eo e armo cavet.  
Diou bistolen a daou den, ur sabren, ur sifflet.

P'ho devoa gret ho ingal hac ho procès-verbal,  
Unan den-eus ar gendarm a c'hoez enni ractal,  
Hac en em rentas pevar deus e gamarado  
Da velet o c'habiten var an douar maro.

Pa veljont an habijo e fellas d'he tec'hel :  
En un rent a a renqont pe deuan da vervel,  
Ha lezel ho garroti hac ho c'has d'ar prison :  
En Paris e recevoit ho c'hondannation.